

Obidoù Vincent Van-Gogh

Bez' ez eus, un tregont kilometr bennak en norzh da b/Pariz, ur gumun hag a zo anvet Auvers-sur-Oise. Anavezet mat eo an anv-se e meteier an arz abalamour ma labouras eno livourien vrudet evel Pissaro, Corot, Cézanne ha Daubigny. Un drevadennad a arzourien ez eus bet eno, adal ar bloavezhioù 1860. N'eo ket souezh rak boas e oa al livourien, d'ar mare-se, d'en em vodañ en distro, e lec'hioù dudius, evel Barbizon pe Pont-Aven, evit klask an awen ha labourat e peoc'h.

D'an 20 a viz Mae 1890 ez erruas eno ul livour izelvroat oadet a 37 vloaz, Vincent Van-Gogh e anv. Tremena a raio e Auvers daou viz diwezhañ e vuhez, o liveañ. E vreur Théo, bet a-holl-viskoazh un harp hag ur c'hennerzh dibar evit Vincent, en deus aliet anezhañ d'en em dennañ e Auvers, hag erbedet en deus anezhañ war ar memes tro d'ur mignon a-gozh, an aotrou Gachet, ur mezeg kar-an-arz anezhañ, hag a zo o chom eno ivez. Rak Vincent a zo fall e yec'hed ha bresk e spered, ha tro en deus bet c'hoazh da dañva ar soubenn dreut a vez servijet e ti ar re sot d'ar re a zo troet o fenn.

Feurmet en deus Vincent ur gambrig en un

ostaleri er bourk, ha bemdez ez a kuit, mintin-mat, dre ar parkeier, e rikoù livañ gantañ a-dreuz-skoaz. Plantañ a ra e varc'h-livañ en ul lec'h diouzh e zoare, ha labourat a ra, e-unan-penn, eurvezhioù-pad, hep damantiñ outañ e-unan. Dek lien ha tri-ugent e livo evel-se, etre an 20 a viz Mae hag an 28 a viz Gouere. E-touesk al lienoù-se, unan hag a zo brudet-kenañ : *Parkad ed gant brini*.

Ober a ra dreist e c'halloud avat, ha gwallgas e gorf hag e spered gant al labour. A-vareadoù e teu barroù enkreiz dezhañ, ar boan-spered a wask anezhañ devezhioù-pad, hag an aotrou Gachet e-unan n'eo ket evit skañvaat e zroug.

D'ar Sul 27 a viz Gouere, goude bezañ livet e lien diwezhañ (*Gwrizioù ur wezenn*) en ul lec'h digavandenn, e klask en em zistrujañ gant un tenn bistolenn en e vruched. Den ne oar dre be vurzhud e teu a-benn da ruzañ betek e gambrig. Eno eo e varvo an deiz war-lerc'h, d'al Lun 28 a viz Gouere, diouzh an abardaez, o tiwaskañ poanioù bras, daoust da brederioù an aotrou Gachet. Lidet e vo e obidoù d'ar Merc'her 30 a viz Gouere 1890. Un ugent den bennak, arzourien peuzholl, a zeuio d'an interamant.

E-touesk ar vignoned-se, deuet da ambroug an arzour milliget betek ar vered dindan un heol grizias, ez eus un den war an oad, un tagos a baotr mentet bihan anezhañ, dezhañ ur barv troc'het berr o louediñ, ha daoulagad glas-mouk en e benn.

An den-se a zo anvet Julien Tanguy, met an holl a ra *an Tad Tanguy* anezhañ. Marc'hadour livioù eo diouzh e vicher, ha mignon eo d'an arzourien, karet ha doujet ganto en abeg d'e vrokusted, d'e hegarated ha d'e eeunded. Ha gwir eo en deus ar vrud da vezañ un den leal ha reizh a galon, unan gouest ivez da reiñ alioù fur ha poellek d'al livourien varrekañ diwar-benn o labour, daoust d'e ziouer a zeskadurezh.

Koulskoude, evit komz heñvel ouzh ar wirionez, ne oa bet tra ebet ouzh e donkañ da zaremprediñ brasañ arzourien e amzer. A-raok en em staliañ evel marc'hadour livioù e Pariz, en doa graet hirik ha berrik, ha tremenet e zaou-ugent vloaz kentañ e korn-bro Sant-Brieg, war ar maez, koulz lavaret, e-touesk tud vunut hag a oa pell o frederioù pemdeziek diouzh an tabutoù kenedoniel ha diouzh ar selledoù diwar-benn an arz dre vras.

Savet em eus ar studiadennig-mañ evit dezrevelliñ buhez an den kevrinus-se, ha klask kompren penaos e teuas ur plouezad dizesk a Vreizh-Uhel da vezañ brudet e meteor an arz.

Ur yaouankiz kuzh ha diglod

Ar beorien e vez dister, peurvuiañ, ar roudoù paper a gaver diwar o fenn, ha re skort e vez an ditouroù-se evit ma c'hellfer en em harpañ warno da zezrevelliñ istor o buhez : *Ar paour ne gan den e glodoù*. Evit bugaleaj ha yaouankiz Julien Tanguy n'hon eus nemet tri zeul, dezho un dalvoudegezh kefridiel : an akta a c'hanedigezh, e 1825, a gaver e ti-kêr Pledran ; ar skrid dimeziñ, eus ar bloaz 1855, e ti-kêr Sant-Brieg, ha, bloaz war-lerc'h, skrid-ganedigezh e verc'h, Mathilde, e Sant-Brieg bepred.

Ret eo ober gant ar pezh a zo.

Ganet eo Julien Tanguy d'an 28 a viz Even 1825 en ur gêriadenn anvet *La Touche Jaguet*, un tri c'hilometr bennak diouzh bourk Pledran, ur gumun vras e su Sant-Brieg, ha dispartiet diouzh ar gêr-se gant kumunioù Ploufragan, Tregaeg ha Langaeg. Ur gumun diwar ar maez eo, enni d'ar c'houlz-se un 3000 bennak a annezidi, kouerien hag artizaned ar c'halz brasañ anezho. Ur gêriadenn voredet eo *La Touche Jaguet*, enni tri ziegezh hepken.

Diwar an ditouroù douget war an akta a c'hanedigezh e ouzomp e oa oadet e dad, Louis-Jean Tanguy, a 41 bloaz. Gwiader e oa, diouzh e vicher,

hag e vamm, Françoise Goulvestre, kenoad gant an tad, a oa nezerez.

Bremañ m'emaon o skrivañ kement-mañ, n'eus mui abaoe pell na gwiader na nezerez ebet er vro, ha n'eo ket didalvoud, moarvat, lavaret ur geriennoù bennak diwar-benn ar micherioù-se, a oa ken stank gwechall war ar maez en hor c'horn-bro :

Ur gwiader a zo un den hag a zo e vicher oberiañ gwiadoù gant ur stern. Kalz gwiaderien a zo bet gwechall e Breizh, dreist-holl etre ar XVI^{vet} hag an XIX^{vet} kantved. Ar re a rae ar vicher-se a labourer er gêr, rak biskoazh n'eo bet greantelaet ar gwiaderezh en hor bro. Ma fell deoc'h gouzout ouzh petra e oa heñvel ur stern-gwiader, ec'h erbedan deoc'h teurel ur sell war un daolenn bet livet e 1888 gant Paul Sérusier, hag a zo *Le Tisserand breton* an titl anezhañ. Gwelet e vez war an eoullivadur-se un den en e goazez ouzh e stern. Peurvuiañ ne veze ket a lab a vije bet moaien da lakaat ar stern enni : ar gwiader a ranke labourat en ti end-eeun, hag ar stern-gwiader a oa ur beñveg hag a yae kalz a ichoù gantañ. Bezañ gwiader ne oa ket un ebat, rak an artizaned-se a dremene betek 12 pe 14 eurvezh bemdez o kas ar stern en-dro : kalz a labour – hag ul labour lazhus – ha nebeut a c'hounidigezh, evit komz heñvel ouzh ar wirionez. Ar varc'hadourien lien eo a binvidikae dreist-holl, ha ganto e voe lakaet sevel an tiez brav a weler bremañ c'hoazh e Kintin, Kastellaodren, Monkontour, pe Uzel. Ar

wiaderien a labour e vit ar varc'hadourien-se e oa dister o gopr.

Met arabat livañ un daolenn re zu : ar wiaderien a c'halle bevañ diwar labour o divrec'h memestra. E 1825 e oa c'hoazh un 2500 gwiader bennak e kornbro Sant-Brieg, met krog e oa dija mare an diskar evito : war nebeutaat ez ae ar gwiadoù gwerzhet, ha tamm-ha-tamm e rankas an dud paouez gant ar vicher, abalamour d'an diouer a fred war ar gwiadoù produet e Breizh. Neuze ec'h astennas an dienez hec'h eskell du war ar vro, ha kalz tud, taolet war an hentoù en diouer a bep tra, a rankas mont a di da di, da c'houlenn an aluzon adal ar bloavezhioù 1840.

Ma oa al labour ouzh ar stern trevell bemdeziek ar baotred, ar merc'hed, int, a neze alies, ha n'eo ket souezh eta e vije bet meneget, war skrid ganedigezh Julien Tanguy e oa e vamm un nezerez anezhi. Amañ ivez e ranker resisaat an traoù : nezañ a zo treuzfurmiñ gloan, lin pe kanab e neud en ur ober peurlvuiañ gant ur werzhid, ur c'harr-nezañ. An nezerezh ne oa ket moaien da vevañ dioutañ, met un doare e oa da zegas d'ar gêr un nebeud gwenneien ouzhpenn. Peurlvuiañ eo war o amzer vak e neze ar maouezed.

Re d/Tanguy ne zeue ket ar gwenneien hep poan en o godelloù eta, ha Julien a gomprenas buan, moarvat, petra eo bezañ paour. Koulskoude ne oa ket e dud reuzeudikoc'h eget an dud all e Pledran :

an ti-plouz e oa o chom ennañ a oa bihan, teñval an diabarzh anezhañ evel-just, ha douar palumet eo a yae d'ober al leur. Ne oa en ti nemet ar pep retañ a-fet arrebeuri : un daol, skiñvier, gweleoù, ur pres da lakaat dilhad ha lienaj, hag un armelig da glenkañ al listri kegin. Bez' e oa avat, sko ouzh an ti, ul liorzh-legumaj, ur c'hraou bihan evit al lapined, hag unan all brasoc'h evit ar pemoc'h. Ar pennoù-yeer a yae, dinask kaer, da glask o boued tro-dro d'an ti, hag e veze serret warno diouzh an abardaez, da viret na vijent debret gant al lern. Ur vuoc'h a oa ivez, moarvat, rak re d/Danguy a oa kenkoulz kouerien ivez.

Julien, evel ar vugale all war ar maez d'ar c'houlz-se, en deus desket, bihanik-tra, sikour an dud war-dro al labourioù tenn en atantoù tro-war-dro : foennat, mediñ, dornañ, gouzeriañ, tennañ avaloù-douar ha boetrabez. Estreget al labour avat a zo bet en e vuhez, ha tremenet en deus bet kalz amzer, moarvat, o redek dre an hentoù don hag o c'hoari gant ar voused all er stankenn a oa izeloc'h eget kêr : ma oa bihan an ti, e oa en diavaez un dachenn c'hoari divent ha diharz. Desket en deus, bep un tammig, ober, gant rusk haleg, kernier-boud a lakae ar stankenn da dregerniñ ganto, ha savet en deus ivez, gant mein ha kaoc'h-saout, fernier bihan da boazhañ avaloù. C'hoariet en deus brezel bihan gant ar baotredigoù all, ha savet en deus war ar wazh, gant tammoù haleg pe gelvez, meilhoù

bihan hag a droe ken brav ma oa un dudi sellet outo... Plijadur en deus bet ivez o klask e-touesk an delioù peadra d'ober ur boazhadenn gistin pa zeue mare ar c'histina. Krabiset en deus bet e zaouarn ouzh ar spern ha dic'hailhet e zilhada ouzh an drez pa veze o vouara. Kraoñ-kelvesa en deus bet graet ivez, ha krapet eo dispart-kaer war lein ar gwez evit neizhiata. Ur vugaleaj e-kreiz an natur, ur yaouankiz a-unvan gant an dud, al loened, al laboused hag ar gwez, kellusket gant distro feal ar pevar amzer, er-maez hañv-c'hoañv, dindan oabl frank Pledran, e barrez c'henidik.

Pep den e vez merket e vuhez ha goveliet e demz-spered gant aergelc'h e vugaleaj, ha Julien Tanguy a zo bet eürus e vloavezhioù kentañ, a gement a c'heller lavaret.

N'ouzer ket ha bet eo er skol. Ne oa ket c'hoazh, d'ar c'houlz-se, eus ar skoliata ret ha digoust, ha ken diarc'hantet e oa e dud ken ez eo diaes krediñ o dije dioueret bara evit kas o bugale d'ar skol. Ne oa ket distudi a-grenn koulskoude, ha desket en doa skrivañ ha lenn un tamm bihan, rak ar re o deus anavezet anezhañ diwezhatoc'h e Pariz a lavaro e lenne, gant sikour e verc'h – gant poan avat hag o teukañ ouzh pep ger –, ar c'helaouennoù dispac'hel a zeue er-maez er bloavezhioù 1870.

Evel an holl dud paour d'ar c'houlz-se e rankas Julien klask fred abred : *ret eo d'an den n'en deus netra labourat tenn hag hep gouelañ*. Gouzout a reer ez eas

da gentañ da wiader, evel e dad. Met ar gwiaderezh a yeas da fall adal ar bloavezhioù 1840 ha Julien a rankas cheñch micher goude pemp pe c’hwec’h vloaz. Mont a reas da blastrer neuze, ha labourat a reas, un nebeud bloavezhioù-pad, war ar chanterioù sevel-tiez, e Sant-Brieg hag er c’humunioù tro-war-dro. Eno e reas anaoudegezh gant Renée Briend, ur vicherourez anezhi, genidik eus Hilion, ur gumun en arvor bae Sant-Brieg. Renée a oa ken paour ha Julien, ha pell e voent oc’h en em zaremprediñ a-barzh dimeziñ an eil gant egile.

Bloavezhioù-pad ez eas Julien bep Sul da welet Renée e Hilion. An div eurvezhiad a vale etre Sant-Brieg hag Hilion, dre hentoù an arvor, a oa nebeut a dra evit ur baleer diroufenn eveltañ. D’ar Sul abredik mat e kemere penn an hent. Goude bezañ treuzet bourk bihan Saozon, e ranke tremen e-biou da vaner kozh Sant-Ilan, pintet uhel war lein un tornaod ha neizhiet kaer er brouskoad, kent hedañ an aod betek Ifiniég.

Un daolenn gaer a vez eno dirak an daoulagad pa vez digatar an amzer : al lec’hidennoù en em astenn pell betek rizenn an dremmwel, en norzh, du-hont, etre an oabl hag ar mor, hag an dour a hast dre gement revorenn a gav dirazañ. Ne glever nemet kroz an tonnoù war ar groioù ledan, yudadenn an avel en oabl frank ha ragach al laboused-mor er broenegi.

Julien e veze gounezet e spered bep tro gant

ur santad kreñv a frankiz hag un esmae hep e bar, endra ma leunie e skevent gant aezhenn yac'hus ar mor ha ma lakae mein an hent da dregerniñ gant tachoù e votoù. Daoust ha fromet e veze gant an arvest meurdezus-se ? Tuet on da grediñ ne chome ket digas e-keñver kened an natur : daoust hag un den hag a deuas diwezhatoc'h da vezañ mignon mat, skoazeller feal ha kendivizer aketus brasañ livourien e amzer a c'hallfe bezañ diseblant ouzh burzhud al livioù, ouzh marzh ar mor divent ha lugernus evel un hunvre ?

Julien Tanguy ha Renée Briend ne zimezjont nemet e 1855. Tregont vloaz e oa Julien d'ar c'houlz-se, ha Renée a oa pemp bloaz koshoc'h evitañ. War ar skrid dimeziñ e lennomp anvioù ha micherioù an testoù bodet e ti-kêr Sant-Brieg d'an 23 a viz Ebrel 1855 : ur c'habiten a vor, ur c'here, hag ur gward-maezioù.

Da gentañ e klaskas ar c'houblad tud yaouank chom da vevañ er vro, met diwar-benn o buhez etre 1855 ha 1860 ne ouezer netra, koulz lavaret. Petra a rejont ? Daoust hag-eñ e kendalc'has pep hini gant e vicher kent ? Daoust hag e klaskjont, evel m'eo bet displeget gant lod tud, diazezañ ur c'henwerzh bihan e Sant-Brieg ? Ar pezh a zo diarvar eo e voe ganet o merc'h Mathilde e Sant-Brieg e miz Genver 1856. Pevar bloaz goude, da lavaret eo e 1860, e adkavomp re d/Tanguy e Pariz, ha Julien a zo d'ar mare-se implijad e Kompagnunezh Hent-houarn ar